

8N3-5-027

EVIT DEDI ILIZ GWINEVEZ-LOCHRIST ADSAVET

d'ar 15 a viz Gwengolo 1936

DISKAN

War an douar evel en Env
Gloar ha meuleudi da Zoue
Euz an eil kanved d'egle



I

Evidomp holl, Gwineveziz
Na kaera gonel, na kaera deziz
Pa z'eo adsavet hon Iliz.

II

Adsavet eo, koant ha skedus
Livet e gwen, e glaz, e ruz!
Biskoaz n'eo bet ken dudius.

III

Mar d'eo nerzus an tan, siouaz!
M'an deus galloud d'ober droug
Hor feiz zo bet nerzusoc'h c'hoaz.

IV

Paour ha pinvidig, peb hini
En deus sikouret a zrevi
Adsevel d'hor Zalver e di.

V

Rak m'ar d'eo ti ar gristenien
An Iliz a zo c'hoaz ouspenn
Ti Jezuz, gwir Doue, gwir den.

VI

Ennan e chom, bars an aoter
Trugarezus da zigemer
An den santel hag ar pec'her.

VII

Ennan e chom evit maga
Hon eneou gant ar bara
Ar vagadurez nerzusa.

VIII

Ennan pec'her evidot-te
Eo digor divrech'h da Zoue
Leun a druez ouz da ene.

IX

Ennan d'an oïl, sul ha bemdez,
E kinnig e c'hrasou nevez
Da greski tan hor c'harantez.

X

Henoromp holl ha deziz ha noz
Evel gwechal hon tadou koz
Perched gwirion ar baradoz.

XI

En iliz Jezuz hon Aotrou
N'eman ket o c'hedal madou
Ne glask nemet hor c'halonou.

XII

Petra dalfe benerez flour
Gwer livet brao, arc'hant hag aour
Ma ve hor feiz toc'hor ha paour.

XIII


Kristenien touomp holl eta
Dont aketus d'an Iliz-man
Da g'innig hor c'halon d'ezan.

XIV

Santel, Santel, teir gwech Santel
Eo palez sakr an eternel
Krenit ha stouit tud fidel.

Aotre da voulla
Kemper, 16 a viz east 1936.

P. JONCOUR, Vikel Vras.



EGLISE DE PLOUNEVEZ-LOCHRIST
incendiée le 15 Mai 1935
rendue au Culte le 15 Septembre 1936

